


Meurriad

BLOAVEZH MAT !!!

#2^{oo}5

BANNOÙ-TRESE
HA C'HOARIOÙ !



KAZETENN VIZIEK - GENVER 2005 15 €

DEPIERROIS • NICOPY • LE TREUST-LOL • AURELIENH • TUDU
CHOUIN • BALAN • Malfondet • MORVAN • SANGLA • LEDORVEN

RENAULT
SCENIC
& SCENIC BRAS


HA MA VEFÉ TAPET LAÑS GANEOC'H ?
SCENIC. AR REFERANÑ.




GARAGE SAINT-ROCH

HENT BREST 29830 GWITALMEZE - PGZ : 02 98 48 15 48 - PLR : 02 98 48 12 93






N'EO...
N'EO KET
ROUBL!



<GELLOUT A RIT CHERCH
AN DAZONT-SE... PROUEZIT
GANT A DREZELIOU... DIABIT
DORREOÙ D TOUJAÑ GWELLOC'H
DUZH AN NATUR DRE MA VEZ
AR SROTADUR HAG AN DIOUER
A ENERJIEZHIOU...>



... O KAS AC'HANOC'H
D'AN ARGOLL... SETU
AR PEZH A C'HORDEZO
MOD ALL... UR
BLANEDENN BARU
HA NETRA BEU
WAR HE GORRE...>



< BREMAÑ EO DAR
DIN KAS AC'HANOC'H EN-DRO...
IMPLIJET E UD TOUT AN ENERJIEZH
A CHOM C'HORZH... KAS A BAN AC'HANOC'H
EN-DRO D'HO LEC'H DRIN... UN
NEBEUD EILENNOÙ A-RADK AR MARE
MA 'M EUS DILEC'HET
AC'HANOC'H...>



<AR SPI DIVEZHAN
OC'H-C'HWI... ROET 'ZO
BET DEOC'H DA C'HOUZOUT
- DEOC'H D' OBER EUS AN
GWELLAN... BEZAN FUR
HA MENNET...>



HE...
PE... PENAOS
OBER?

<PROUEZIT
GANT
PEP TRA I...>



ZERAM

<PROUEZIT
KEIT HA MA
C'HELLIT
OBER C'HORZH...>




<SETU...
N'EUS NEMET
GORTOZ DA
WELLET...>




<CHANS
DIVEZHAN
AN DENELEZH
E DA...>

< DA EN DO
DAVE TRUEZ
DUZH E UUGLE
WAR WAK
...>



KA-CHUK
NANN!

WASHINGTON
AN TI GWENN - 5:59 AM



NANN !
N'EO KET
POSUPL !

PETRA
C'HOARVEZ
GANEOC'H ? UR
GWALLHUNVRE ?

MORSE !
MORSE NE
ZEVUN A-BENN.

MORSE.
MORSE NE ZEVUN
A-BENN DA ZERC'HEL
SONJ OUZH MA
HUNVREOU.

BO, NE ZLEFE
KET BEZAN GWALL
BOUEZUS. MAT. PET
EUR EO ? PETRA
A VO D'AN

DIJINI ?
GWASTILLI
BRETZEL A
YAFE GANIN
A-WALCH.

RA EN DO DOVE
TRUEZ OUZHOMP !

SOS Euzhvil



HARE GALETEZENN AR ROUANED EO !
DREIST !

HA
DOUT !

DAV DEOMP LAKAT
AN EUZHVIL-SE DA
SKAMPAN.

UR C'HOULIAD A-ENOR
HON EUS, A WELAN.

DIW DA ZIBAB
AL LODENNOU

DAH 'YA!
AN DISAC'N-
GALETEZ.

TIP TIP
BUAN,
SOS EUZHVIL

UR C'HOULIAD ROZ
HON EUS A ...

HAG AL LODENN-
HAN, EVIT PIV ?

HUH.
GWELET
A RAN. DAV DE-
ZHAN LONKAN PEPEAN
AN DISAC'N-GALETEZ !

EUZH...
EVIT AN
DRA ROZ

A ! HOR C'HOULIAD AN HINI EO
CAI DO AN ENOR DA DAVVA HOR
GALETEZENN HOLL-VRUDET

KAKS

FAGH

DEMAT, HEMONED.
SUPER FAVENN-HAN A VEZ ORACT
OUZHEN. BLOAVEZH MAT A HETOMP
DEOC'N A-BEREN AN SOS EUZHVIL

TOURRELL AR FALTAZI


AURELIEN H



5 ROMANT NEVEZ DA LENN E PEP LEC'H !



embannet da geiwer **PRIZ AR YAOLLANKIZ 2004.**
 Gourc'hemennit anezho diouzhtu e ti KEIT VIMP BEV 22 grand rue 29520 LAZ



goulc'hen

marc'heger



Anv:
GUYOT
Anv Bihan
Goulc'hen
Cad: 17
ar sportour
a bliñ din:

Erwan Konk,

mell-droad war gador-ruilh

ar vro:

Iwerzhon

Ar skipailh

mell-droad:

Roazhon

Ar benveg sonerezh:

Fleüt a-dreuz

Ar ganaouenn:

Bro gozh ma zadoù

Al liv:

Du

An dibenn-pred:

an dartezenn sivi

Ar C'harr:

Porche

Ar film:

Gotika

Meuriad : Goulc'hen, petra eo ar brasañ plijadur ho peus bet gant ur marc'h ?

P'am eus gounezet ur genstrivadeg evit ar vech kentañ. 10 vloaz e oan d'ar mare-se. Ar wech kentañ din santout pegen kreñv eo bezañ daou evit gounez. Peogwir e ra ar marc'h hag ar marc'heger ur c'houblad.

Aon ho peus bet a-wechoù ?

Pa 'm eus kroget ar marc'hegan em boa aon bep sadorn a-raok mont d'am c'hentel. Met, 'mod all, morse n'em eus bet aon, kement-se.

Ur marc'h deoc'h hoc'h-unan ho peus ?

N'em eus ket. Met peurliesañ, pa vez graet kenstrivadegoù broadel, e vez prestet deoc'h ur marc'h a benn gourdoniñ anezhañ mat.

Penaos eo deuet deoc'h ar c'hoant mont war varc'h ?

E penn kentañ ne oa ket ur c'hoant, rak ne oan nemet 5 bloaz. Hag, e gwirionez, ma 'm eus kroget gant ar marc'hegan eo peogwir ne blije ket din ar

judo. Aon em boa d'ober ruihadennoù.

Seurtoù kezeg a bliñ deoc'h muioc'h eget reoù all ?

Bezañ plijet gant ur seurt kezeg pe gant unan all n'eo ket ur gudenn. Se a zo hervez ar pezh ho peus c'hoant ober, e gwir. Ma plij deoc'h ober sport e choazit ar CSO pe ar CROSS. Ha neuze e vo kemeret kentoc'h ar gouenn "selle français". Ma plij deoc'h muioc'h ober pourmenadennoù e vo kemeret an "apaloosa" hag a zo ur marc'h implijet gwechall gant an indianed.

Petra eo an diaesañ d'ober gant ur marc'h ? Lammou ? Traoù all ?

Al lammou n'int ket diaesoc'h eget traoù all. Evit ma vefe mat ur marc'h e forzh peseurt sport (trec, cso, dressage...) eo ret reizhañ anezhañ pa z'eo yaouank.

Ur sport evit ar re binvidik eo ar marc'hegan ?

Ya, gwir eo. Met ar prizioù a zo hervez ar c'hluboù. Da skouer e

PP (...) Ne c'heller

ket bezañ

marc'heger
mat nemet goude

bezañ bet pleustret

7 vloaz,

d'an nebeutañ.

vo kalz keroc'h ar c'hentelioù en ur c'hlub e kêr da geñver unan war ar maez. Me, da skouer, ne baean ket kalz e-keñver ar pezh am bije da baeañ, sañset, peogwir, ma'z on er c'hlub abaoe dek vloaz bremañ, e sikouran ar prezidant. Neuze, evit kaout un digoll, ez an war varc'h evit netra.

Muioc'h a verc'hed eget a baotred a vez o varc'hegan ?

Pa vez kroget ar marc'hegan, da lavaret eo war-dro 5 bloaz ez eus kement a baotred hag a verc'hed. Met n'eo nemet adalek 8-9 bloaz ez a kuit ar baotred. Evit mont war varc'h eo ret kaout kalz a basianted. Hag ar merc'hed o deus kalz muioc'h eget ar baotred. Me, da skouer, em eus poan gant-se a-wechoù.

Perak 'ta ?

Ul labour war hir dermen eo ar marc'hegan. Ne c'heller ket bezañ marc'heger mat nemet goude bezañ bet pleustret 7 vloaz, d'an nebeutañ. N'eo ket evel ar foot pe sportoù all. Evit kregiñ da vezañ mat a-walc'h eo ret kentañ 3 bloaz.

Petra emaoch e soñj ober goude, ur wech tapet ho tiplom monitour ?

Ur wech tapet anezhañ e c'heller labourat. Da lavaret eo ober war-

dro ar vugale. Neuze, dre ma n'em eus ket c'hoant ober ma m'icher ouzh ar marc'hegan e vin monitour e-pad vakañsoù an hañv. D'ar mare-se ez eus ezhomm monitourien rak kalz a vugale a vez o tarempeidiñ ar c'hluboù, enoet ma vezont er gêr.

Petra a bliñ deoc'h er marc'hegan, ar c'henstrivadegoù, ar pourmenadennoù pe traoù all c'hoazh ?

Ar c'henstrivadegoù. Aze e vez gwelet disoc'h al labour graet e-pad ar pleustradegoù. Rak kredet e vez gant un nebeud a dud eo ar marc'h a ra tout. Met ma ne vez ket gourdonet anezhañ, ne vo ket a zisoc'hoù mat e-pad ar c'henstrivadegoù.

Petra en deus degaset deoc'h ar marc'hegan ?

Kaout muioc'h a basianted din rak ur marc'h ne gompren ket eus an taol kentañ ar pezh a vez goulennet digantañ ober, peurvuiañ.

Karout ar c'hezeg a lak ac'hanoch da garout al loened all ivez ?

An darn vrasañ eus an dud a bliñ dezho mont war varc'h a zo dedennet gant an natur ivez, ha neuze, anat, gant al loened all. Met ouzhpenn-se a zo. Da skouer, ma c'hlub a zo ur gwir ti-feurm, gant loened all. Daremprediñ kezeg a lak ac'hanoñ d'en em gavout gant loened all an tant.

Kampionad Bro-C'hall
e Sant-Gondran
d'an 12 a viz Gwengolo 2004



AR GER KEVRINUS

- Un devezh-arat a dalvez :
B- 1 hektar
A-2 hektar
G- 1/2 hektar
- Patez ar pemoc'h a vez hec'h anv :
U- ar wiz
Z- ar bemoc'hez
I- an oc'h
- Talvezout ar raat lev da :
P- 4 km
O- 2 km
D- 1 km
- Ul lur bouez a dalvez da :
M- 1 c'hilo
O- 2 gilo
C'H- 1/2 gilo
- Ur gastaeron a zo :
I- 250 gr
N- 500 gr
T- 750 gr
- Un troad a zo :
G- 25cm
O- 250 cm
Z- 2,5 cm
- Talvezout a ra "d.l.e." da :
O- da lezenn eo
D- da lavarout eo
E- da loerou eo
- Ul lestr a zo ivez :
I- Ur vleunienn
O- Ur vag
D- Ur pesk

lak al lizherennoù er gael dindan o respont d'ar ar goulennoù. Peseurt ger a vo kavet ?

- Kant vloaz a ya d'ober
U- Ur c'hantved
R- Ur c'hantad
Z- Ur c'hrank
- Ur valum a zo da renkañ e-touez :
M- ar pesked
E- ar bronneged
Z- ar morbleizi



TAPISEREZH

An tri heuliad arouezioù-mañ a zo kuzhet en tapis. Ha gwelet a rez anezho ?





horus & thot

David Le Treust.



KLOGORENNOÙ SOAVON

Skriv sifroù ar c'hlogorenoù soavon er c'helc'hioù goulo. Ret eo kavout ur sammad a 39 e pep linenn pe kolonnenn.



A-BLAEN :

- Letuz - 2. An hini all / Berradenn Aotrou
- Araogenn / Pezh dithad - 4. Miz / Dibenn-verb - 5. Klask gouzout pep tra
- Koazez / Ger-mell - 7. Davet
- Herr

A-SONN :

- Dont da vezañ sioulc'h - II. Plant dreinek
- Zo meur a zoue dezhañ - IV. Ger-mell / Unanenn hed kazh - V. Niver
- Rouez / Araogenn - VII. Kempenn - VIII. Goude an deiz / War an hent houarn

DIBLUSKAN AVALOÙ

Erwan, Koupaia, Kaou, Iona, ha Tangi o deus diblusket avaloù. Pep hini en deus bet ur sailh skrivet e anv war gorre. Pet aval a vo kavet e-barzh pep sailh ?

- Ar 5 bugel o deus diblusket 25 aval, en holl.
- Un gont dishevel a avaloù a vez kavet e-barzh pep sailh.
- Er sailh vrasañ e vez kavet an nebeutañ a avaloù, met muioc'h evit unan, memestra.
- Er sailh bihanañ e vez kavet un hanter dousennad a avaloù.
- Er sailh a zo e-kreiz ez eus kement a avaloù haq ez eus en daou sailh tostañ. Nebeutoc'h eget 10 aval a zo en holl, en 3 sailh.
- Gant Tangi ez eus 3 aval muioc'h eget ma vez er sailh vrasañ.



BARA AR ROVANEZ

Evit Kalanna eo bet pignet ur wastell. Buanoc'h he deus graet Rozenn evit he breur a-benn kavout ar fevenn.



pelec'h emañ an tamm gwastell a vank ?



TORREBENN

Penaos rannañ ar wastell-mañ e eizh lodenn kempouez goude troc'hañ anezhi teir gwech nemetken ?



AR WASTELL

Gant 8 kreion eo ret dit liveañ ar wastell-mañ. Met ret eo dit en ober en ur heuliañ ar reolennoù da heul :

Arabat d'an 8 liv-mañ en em douch, gant forzh peseurt tu e vefe, zoken gant ur c'horn.



E-barzh pep rann e vo kavet an hollad a 8 liv




DAOL AR ROUANED

Gant Ronan eo bet pedet un nebeud mignoned da zebrñ bara ar rouaned. Klask kavout e peseurt plas eo bet staliet pep hini :

- Staliet eo bet Mari e-kichen Ronan.
- Azezet eo Lanwenn etre daou baotr.
- Staliet eo Lomig e-tal Ronan.
- Ne blij ket da Lena ar wastell.
- N'eo ket azezet Mari e-tal Lena.
- Staliet eo Tomaz e-kichen Ronan



OLIER & WACOU



Kroupet gant Patrice MARQUANT

A-BLAEN :
 1. Bro orin ar Vretoned - 2. Asant / Ober a raio
 3. Straed / Obererezh an hini zo da gentañ o
 kinnig traoù eus e benn e-unan - 4. Kementad bras
 a draoù / Dindan ar siminal - 5. Un tammig pelloc'h
 eget amañ / Deiz kentañ ar sizhun / Notenn sone-
 rezh - 6. Dizurzh vras - 7. Raganv / E tour an iliz -
 8. Lakaont aet da vont e-barzh o skevent - 9.
 Avelin / Plant - 10. C'hoant / Stumm ar verb bezañ
 / Organ lec'hiet en tu deou d'ar c'horf

A-SONN :
 I. Diouer a sevenadur - II. Frankizenn
 III. Dibenn an anv-gwan-verb / Dont da vezañ
 reutoch - IV. Frouezh ar sporn-du / Nac'hadenn -
 V. Luskad bouadaat / Unan eus ar pavar rumad
 kartoù - VI. Lorbin - VII. Silejvil / Spolm -
 VIII. Liñvenn zruz / Seblant - IX. Unaded /
 Keunouenn - X. Lec'h ma treuzer ur stêr war
 droad / Liv

AR 15 DIFORC'H



BRETONED YAOUANK EN DOUAR SANTEL



Eus ar 17 d'an 29 a viz Eost tremenet omp bet o pirc'hirinañ en Douar Santel. Ni, liseidi ha studierien, brezhonegerien ac'hanomp, a oa kaset gant ar c'hoant da vevañ asambles war roudoù Jezuz. Daoust d'ar brezel oc'h ober reuz hon eus gallet dizoloñ e vro ha bevañ hor feiz gant levenez.



Ur banne le berr tamm-barv evit tervñ deomp hor sec'hed e straedoù Betleem.



Manifestadeg e straedoù Betleem evit ma vije doujet ouzh gwiriou mab-den en Israel hag e Palestin.

E Jeruzalem hon eus kroget hon troiad en Israel-Palestin. Ar gêr-se, savet war ur menez, a zo ul lec'h sakr evit ar juzevien hag ar vuzulmaned koulz hag evit ar gristenien. Doug an istor eo bet savet lec'hioù sakr eus ar c'haerañ gant an dud-fidel evit enoriñ ha pediñ Doue. Ar savadurioù-kozh-se, gant mogerioù ar gêr-gloz, a ra eus Jeruzalem ur gêr kaer-kenañ da weladeniñ. Pebezh plijadur pourmen er souk evel en ur milendall, e-touez ar werzherien a-bep seurt ! Dre ar straedoùigoù omp aet betek iliz an Adsav, da bediñ war bez ha lec'h adsav Jezuz a varv da vev.

E-keit ha ma oamp o redek kêr 'mod-se e plije deomp paouez bep an amzer en un iliz pe en ur chapel bennak, da ganañ kantikoù, da bediñ, d'ober anaoudegezh gant tud ar vro. Degemeret omp bet alies gant an dud, ha profañ 'raemp deomp ur banne fresk da derriñ deomp hor sec'hed. Ur wech, zoken, hon eus tremenet ur mare hir da c'hoari ha da ziskuizhañ en ur jardin burzhudus, enni frouezh sitroñs, mañg hag olivez e-leizh ar gwez ! Ur gwir varadoz !

Met siwazh ! N'eo ket ken kaer-se an traoù evit an holl er vro-se. A-walc'h eo bet deomp mont da Vetleem (e-lec'h m'eo ganet ar C'rist) evit kompren pegen trist ha kalet eo ar vuhez evit ar Balestinianed. Eno hon eus gwelet moger ar gasoni a zo bet savet gant gouarnamant stad Israel war douaroù ar balestinianiz. Savet eo bet en-dro da Vetleem, o tispartiñ anezhi deus Jeruzalem, ha n'eo nemet un 10 km bennak pelloc'h, koulskoude. Gant tud ar gêr-se omp chomet e-pad pell da gomz diwar-benn ar c'hudennoù a sav abalamour d'ar voger-se. Familhoù a zo bet dispartiet dre faot ar voger-se. Mirout a ra ouzh ar vugale da vont d'ar skol, ouzh ar beizanted da vont d'o farkeier, ouzh ar re glañv da vont d'an ospital... Deuet eo Betleem da vezañ evel ur prizon.

Petra ober neuze dirak kement a gasoni, a feulster, a dorfedoù a-enep da wirioù mab-den? Sebantiñ a rae deomp e oa kollet o fiziñs en dazont gant ar balestinianed, rak diaes eo dezho gouzout penaos e c'hellje an traoù mont war wellaat. Evito eo dibosupl, pe dost, raktresañ tra pe dra a zeiz da zeiz. Petra hon eus graet, ni, neuze estreget pourmen, pediñ, kanañ ha c'hoarzhin da gas un tamm bennak a sikour dezho ? Aet omp daveto, en ul lec'h ne c'hellont ket, int, kuitaat. Savet hon eus darempredoù ganto, o selaou anezho hag o klask kompren ar pezh o doa da lavaret. N'eo ket kalz a dra, kredapl-bras, met degas a rae dezho un tamm bennak a fiziñs hag a garantez. Hag, a dra sur, ez eo a-drugarez d'an dud o vevañ duhont, daou vil vloaz goude Jezuz, hon eus-ni, Bretoned, bevet asambles ur birc'hirinaj dreist-ordinal.

MAELA ha KAOU



Ur banne le berr tamm-barv evit tervñ deomp hor sec'hed e straedoù Betleem.



Manifestadeg e straedoù Betleem evit ma vije doujet ouzh gwiriou mab-den en Israel hag e Palestin.



Ar stroald pirc'hirined en e bash : ur mare a beoc'h hag a levenez en ur jardin vurtudus war menez an olivez.



Moger ar gasoni tro-dro da Vetleem, ar gêriadenn e-lec'h ma 'z eo ganet Jezuz.





LIN EMGANN ?
BETER AR MARY ?
TUD DROCH !
POENT DEDOMP HASTAN
RON !

HASTAN, HASTAN.
N'ON KET GOUEST
KEN, ME...



RONAN!!
KEVIN!!



NA PELL
OC'H BET GANT HO
TRO... PENAO'S TA ?
O, MA OUIFECH'Y PEGEN
CHALET E OAN. MON
M'ELUS BET. NE ZEUFES
KET EN-DRO.

AN ENKLASKOÙ
NE QANT KET ANAT.
MET FROUEZHUS MEMES-
TRA. ADRAVET HON ELUS
E ROUDOÙ.

DEUIT!



BETEK
AR MARY ?
PEGEN DIBOELL
AR SOUDAR-
DED...

'FIN... EN UR MOD
N'EO KET FALLOCH...
NEBEC'OC'H A DUD
BIHAN HA DISTER
A VARVO, HA NIHOOC'H
A BENNOU SOT...



MET RE A VO
C'HOAZH, SIWAZH.
GWELLOCH DIN MONT
DA ZASTUM LOUZOÙ
DA GLASK SAVETEIN
LIN NEBEUD ANEZHIO.
PA NE VEFE NEMET HO
MIGNON, A-RAOK MA
VEFE SAMMET
GANT AN ANKOÙ



MET... AL LOUZOÙ-
SE, NE RAINT KET O
EFED WAR UR CHORF
MARV... EO ?

NE RAINT KET,
MET PENAO'S OBER
E MOD ALL ? MORSE
NE FELLO DA YANN A
GERBRAT TECHHOIT
DIRAK E ENEBOUR

UR MARC'HEG
A GOLLFE E ENOR
MA C'HOARVEZE
GANTAN TECHHOIT



HA PENAO'S
E RAIMP
EVIT TOSTAAT
OULTAN
AN DEIZ-SE ?


BEZAN AN TOSTAN
FOSUPL OZIH AN EMGAN.
DECC'HEL HOR SELLOU WARNA
HA BEZAN PREST DA VONT PA
LARO KLITOGENOS DROUZ
GANT DIEDOÙ AN DROUZ
HAG LIN TAMM CHAIS

DA VEZAN KENDALC'HET...

KRIZ EO BED

AR SONEREZH

NIKOLAZ



PAQUEZ!!
NE RA KET...
BRIZHAS N'EO KEN!...

D'UN ALL!...

EN EM GANNAÑ A RA AR SONATOURIEN
EVIT KINNIG SONIOÙ DA ZDEP, MET FIGUS EO DEP...



**HA NEVEZ?
LARVEN?**

PENAS VEFEN?
C'HARR EVIT AR PIRE-SE.
GASTROÛN N'EO KEN!

HAG E VREUTER O TISKOACHAN
PEZHAN KEVRATOU ADUR... MET
C'HOANTAUS-TRE EO DEP...



**DEP!
DEP!
UN BOVE
OUT!**

HIZIV EO HEGASET
DEP: SAC'MET EO
CHOMET E VINS-
ASKELL HA RANKET
EN DELS KEMER AR
C'HARR EVIT MONT
D'AR STUDIO...

P'EN EM ZIKOUEZ
E LAK TAN ER
C'HALONDU...




**LOVIN' YOU
LIKE A PIIT-BU**

PAJUST D'E VRUD DIVENT E OAR C'HAZH DEP
KINNIG E ABADENNOU WAR AN TACHENNOU
SPORT... CHOMET EO SIMPL HA GWIRION...



**E-GIL E PAD AR
VAKANSSON A GENER**
GOLDE PEP TROAD
WAR AN ENDEZEN
EN DELS PRENET...



**I WAN TOUTRI
SONADEG**

TREMET DA
WELET A CHANON
BENN UN NEBEUD
BLOAVEZHIOU

CHAHS
VAT!

HA GELLOUT A RIT
CHENCH ALI C'HOZH?
ZOKEN MA LAKAAN
GHEMEKEN
EN AFER?

EIL DIAESTER:
HARIT UR
PRODUKOR GOLEST
DA GOMPEN
MA DAMELON...



ma gerve n'arret an n'ourmerien
n'arret e'oin n'ourmerien, bein
labourat'vat, ne rum ket - ma
guellet h'e k'oumer n'arret
ennout - te
O'levonug, o'levonug
rut ar maru, rit ar'ruhes
o'levonug, o'levonug
te an'buvi eo ma'levonug
(d'iohan)

**MAT EO, SE
MAT-TRE! ME
SONJ DIN E C'HELLAN
PAQUEZ GANT SKEDOU
AR RE ALL EVIT
KINNIG MA RE!**

DIAESTER KENTAN: SKRIVAN TESTENNOU PERSONEL
HA DIVOUTIN... HA HARIT AR SONEREZH A GUT GANTE.

TREDE DIAESTER
HINI AR PEMDEZ...

EVIT AR BLEUSTRADEG
EN NOZ-MAN...
... NE C'HELLAN KET...
SAC'MET EO MA MOB...




**SONER OUT?
DISPAR!**

AR SIKERIEG
A LAK AC'HANON DA
DRELLAN...



HAG AR FAN'S: ROUEZ INT HA
MARTIGLE OUEHPENN N'INT KET GWIK FAN'S...



**PAQUEZIT
GANTAN
TROUZ!**

EVIT AR PEZH A
SELL ELUS VA AMETEG DINDAN
EO SKLAER, D'AN NEBETAN...

DONT A RIT EN NOZ-
MAN? SENIN A
RAN EN M.J.C.

...TRE CHAHS E
C'HELLAN ENEM
DISPARAN WAR
AL LEUREM...

DIGAREZ, FRAI. UN
ABADENN GANT DEP JONES
A TO WAR AR SKINNEL.

DIGUST
E VA?



Un iskiis a iston droi
a gontin d'eo'c'h, unan
ken du hag an noz...

TRUGAREZ DEOC'H DA
VEZAR BET RESPONDET
D'HOE C'HEMENNEDEN,
AOTROU HOROLAJER,
HO LEZEL A RAN D'EN EM
STALMAñ, KEN AR C'HOAZH.

NOZVEZH
VAT DEOC'H,
AOTROU MAER.



Antonoz.

A-BONAN EN EM
GAVET HA STA-
GET OUZH AL
LABOUR DUHA.

ABALAMOUR D'AM
OAD NE C'HELLAN
KET MUI OBER KE-
MENT A DRAOU
HA GWECHALL.



MET
PLIJET'ON BET,
EVTI AR WECH,
GANT KAVANDEHN
AR MEKANIKOU
EST LAMMUS-SE.



KAER 'ZO LARET, UR
BENNOZH EO DEOMP
KAOUT AC'HANOC'H
EVTI DENKAR HON
HOROLAOU.



TOMM-TRE OMP
OUTI, EVEL MA
WELT, DIES-TRE
E KAV AR BOBL
GWELET ANEZH!
SAC'HET MET SETU
DRECH'HET BREMAñ,
A-DRUGAREZ
DEOC'H.




MAT,
MONT KLIT
A RANKAN.
GOUEL KALA-
GOARV AN EUS DA
AOTAR, C'HOAZH,
KEN DIWELZHA-
TOC'H.



MET,
PE...P



AOTROU
MAER ?



MONT
A RAIIO ?

DARBET EO
BET DIN
SEMPLAN.



Ioanis eo...

GOUZOUT A RAN MAT
NE BIT KET WAR-PRO
SEURT LONED, PEUR-
VUMAR, AOTROU MEZEG,
MET DIES E VO D'AR
VUOC'H-MAñ HALAR.



N'EUS KET
AMZER
DA GOLL !



SETU EN
O TONT !

DOUE !

MARV EO !



DAV DEOC'H
GOUZOUT,
RUPERT, N'ON
KET SUR E
TALC'HE HO
BUOC'H
AN TADL.

DA VEZIMP DIWAL-
LET GANT AN
AOTROU DOUE.

PEREZH C'WALLEUR,
MARY AR C'HEMVAR
LOEN GANET E-KERZH
AR GOARV, SETU AKE
UN DIOUGAN FALL !

START EO AR VUHEZ Nikolaz



embannet gant :
KEIT VIMP BEV
 22, grand rue
 29520 LAZ
 Pgz : 02.98.26.87.12
 Plr : 02.98.26.80.35
 keit-vimp-bev@wanadoo.fr

Moulet gant :
OUESTELIO
 505 st. Julien de la Graviere
 BP 30708 BREST cedex 02

Plener ar gazetenn :
Yann-Fañch JACO

Kennuzhiañ / Makatenniñ
 Tremañ ar c'hoarioù :
Owen POHO
 owen.kvb@wanadoo.fr

Tresadenn ar golo :
R. LE DORVEN

Skoazellerien :
P. MARQUAND



Niv. CPPAP : 1005 G 840 75

Istor Iarvus **Yann Bijer**

Ar c'hleñved "prostate".

Job ha Lom a oa kendirvi-dost. Mevelien e oant o daou e maner Kerguzh. Besteed e oa Lom.

An devezh-se e oa an daou genderv o vont war-droad eus foar Pont 'n Abad. Un toullad mat a chopinadoù sistr o doa kaset war-drañ. Setu e oa ret dezho chom a-sav, bep an amzer, evit teurel dour eus strad o c'hof.

Erru e Pont 'n Abad, setu an daou genderv o stroazhañ, ur wech adarre, a bep tu d'un toull-karr.

— "N'eus ket gwelloc'h evit ar sistr evit lakaat unan da zizourañ." eme Job.

— "V... v... v... vad a ra..." a respontas Lom.

— "A ! P'emaomp ganti, a gendalc'has Job, n'az peus ket klevet doare ar c'hleñved a zo taget an eontr 'Zidor gantañ? "

— "T...t...t... tamm e...bet "

— "Ar c'hleñved "prostat" an hini eo, war a lavarer "

— " Ha peseurt kleñved eo ar pro...pro...pro..."

— " Ar c'hleñved "prostat", Lom, a ra d'ar wazed dizourañ dres evel ma komzes-te "

Tresadenn ar miz



Marvin, 11 vloaz, Kemper


Kasit deomp ho trEsaEnnOù.
 Ar re wellañ a vo embannet
 keit-vimp-bev@wanadoo.fr

DARIVS Gilles SANGLA



SUL AR ROUANED

R.LE DORVEN



LE DORVEN 05.